



Bep noz, pa zeu er-maez eus ar gibell, ez a Hoki ar mank betek betek tapis ar saloñs.
 Ne c'hourvez ket evit sellet ouzh ar skinwel.
 Astenn a ra e angelloù a-benn nijal evel ur c'harr-nij.



Mat-tre e teu a-benn d'ober trouz ar c'heflusker. Hop !
 Treiñ a ra Hoki tro-dro d'an daol. Ur wech c'hoazh ha... Aiou !
 Da fall eo aet er gammdro diwezhañ.
 Hag Hoki da vont war-eeun, e benn er voger. Pebezh stokadenn !




Stered e-leizh a zo tro-dro d'e benn !
 Laouen eo. Krediñ a ra dezhañ en deus dibradet.
 Met tamm ebet ! War e gein emañ, o sellet ouzh al lein.
 Na poan en deus d'e lagad ! Tost eo da leñvañ !



A-bell e klev e vamm o c'hervel :
 – Ouzh taol ! Prest eo !

D'an daoulamm ec'h erru Hoki. C'hwezh vat a zo gant ar boued, met tomm eo !




Da c'hortoz e tistanfe e voued e aoz Hoki ur redadeg kirri-nij a-us d'an daol !
Vroummm ! Buanoc'h ez a ar pod-holen eget ar fourchetezenn !



Zip! Diaes eo d'ar fourchetezenn bezañ mestrez war he nijadenn ! Gwallzarvoud !
Lakaat a ra plad Hoki, leun a gig-pesk hag a biz-bihan, da gouezhañ.
Kement a zo anezho ken ne weler ket mui e bijama. Tennañ a ra ar piz bihan
da ganetennoù diroll oc'h ober ur redadeg war garrezenoù al leur.



Beurk. Euzhus-tre eo. Fachet-ruz eo Tadig ha Mammig. N'en deus ket Hoki da zibab. Dav eo dezhañ mont en-dro d'en em walc'hiñ. Plijout a ra da Hoki bezañ er gibell. Ijinañ a ra c'hoariou nevez. Dal, a lâreñ. Klask a rin astenn war ma c'hein. Hag evit ar wech kentañ en em lak Hoki war e gein. Hag eñ da reiñ taolioù angelloù en dour, goustadik-tre.



Ha taolioù c'hoazh, buanoc'h ar wech-mañ. Petra ' c'hoarvez ? War-raok ez a, buan-tre ! Ur gwir lestr-spluj ! Pebezh mennozh iskis en doa, pa glask nijal gant al laboused bihan ! Gwelloc'h e kav Hoki bezañ gant ar pesked bihan, dindan an dour !